




Bleun-Brug Kastellin a enoro al labour douar.

Bleun-Brug

Niv. 61-62 (Mensuel)

Abonnement : 500 Francs

GOUERE-EOST 1953

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1953 ?

An darn vrasa eus hon lennerien a zo echu o c'houmanant. O fed start a reomp eta da baea o c'houmanant nevez raktal, pe da lavaret d'eomp ne gemerint mui ar gelaouenn.

Koumanant bloaz : 500 lur.
Koumanant a enor : 600 lur.
Madoberour : 1.000 lur.

An Ao. Visant SÉITÉ, Sekretour ar Bleun-Brug, a zo bremañ distro en hon touez e Kastellin.

Kas an arc'hant da : V. SÉITÉ, Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteaulin, C.C.P. 544-22 Nantes — hag ar skridou da : M. l'abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan (Finistère).

TAOLENN



Eur c'houlaouenn skedus	1
Bleun-Brug Kastellin	3
Kenteliou d'an dud yaouank	6
Eureujou - Kelou laouen	9
Jarl Priel ha « Mister ar Folgoat »	10
Sivi Plougastel	12
C'hoarzomp	13
Pegen brao beza Mêr	15
Loeiz Herrieu a zo maro	16
Kelc'h lizer 1953	17



133673

Eur c'houlaouenn skedus

D'an 20 a viz Eost a zeu, e vezo eiz kant vloaz abaoe maro **Sant Bernard**.

Ar sant bras-se hag a zo bet galloudusa, brudeta, santela den a vevas, en daouzekved kantved, a zo bet ive an doktor en deus skrivet an traou kaera diwar-benn an Itron Varia. Goueliou hep par a zo graet d'ezañ, e pep lec'h, dre ar bed katolik. Ma komzomp anezañ eo evit unani hor mouez gant hini an holl gazetennou kristen hag ive abalamour ma kaver en e vuhez meneg eus Breiz hag ar Vretoned.

Ganet eo bet, e kichen Dijon, er Bourgogn, er bloaz 1091, en amzer drubuilhus m'edo ar bed kristen prederiet holl gant brezelioù ar groaz.

Disterik a gorf, Bernard a zikouezas abred pebez kalon virvidik a oa en e greiz.

D'an oad a 22 vloaz, e kuita ar gêr, o chacha d'e heul e dad, eun eontr, pevar eus e vreudeur hag eur vandennad mignoned, evit mont da vanati **Sito**, eur manati hag en doa brud da veza rust-spontus ar reolenn a vuhez ennañ.

Konta reer, p'edo o lakaat e dreid, dreist treujou an ti, da vont Kuit, e lavaras da Nivard, e vreur bihana, a leze war e lerc'h : « Kenavo breurig, d'it e vo bremañ an holl vadou ha levedou ». — « A, ya, a respontas ar paotrig, evel-se a rit, c'houi a gemer an neñv evit ho lod hag a lez an douar ganen. An dra-se n'eo ket just... »

Bernard a dremen tri bloaz e Sito, o labourat, o pedi hag oc'h ober pinijenn. E vuhez a zo heñveloc'h ouz buhez eun ael eget ouz buhez eun den. Meur a wech bemdez ec'h en em c'houlenn outañ e unan : « Bernard, d'ober petra out deuet amañ. Ha n'eo ket evit beza eur zant?... Labour ta d'en em santelaat ».

N'eo ket suez, gant menozioù ken uhel, en e galon, e vije aet buan war hent ar santelez.

Ar vrud eus ar santelez-se eo a raio d'eur bern tud dont da c'houlenn beza digemeret er manati.

Ken niverus int deuet da veza ma z'eo ret hedi, evel ar gwenan.

Bernard n'en deus c'hoaz nemet 25 bloaz. Hen eo a zo anvet da Dad Abad ha kaset da **Glervo** da ziazeza eur manati nevez, e kreiz ar strouez hg aar c'hoajou.

Skrijus eo ar pezh en devoa eno, Bernard hag e venec'h, da ziwaska. Koulskoude, n'eo ket an dienez, nak ar vuhez rust a rener eo a viro ouz an dud yaouank da ziredet a-vernioù.

E berr amzer, Klervo a vezo re striz. Ret e vezo sevel kouentchou ha kouentchou nevez.

A zeiz da zeiz, levezon ha gloar an Tad Abad a ya war gresk, dre ar vro, ha dre ar bed kristen a-bez. Ar rouaned, ar Pabed a c'houlenn kuzul digantañ. Kinnig a rer d'ezañ ar c'hargou uhela. Bernard a ra fae warno. Ne c'hoanta ha ne glask nemet beza kuzet. Met en despet d'ezañ e teu da veza holl-c'halloudek.

Galvet ea eus an eil tu d'egile da brezeg, da zibuna kudennoù rouestlet, da lakaat ar peoc'h, el lec'h ma z'oa trouz. Ha bez ez oa kalz d'ar mare-se !

E vuhez a zo eur burzud pemdeziek. Gant petra e vev ? Ne ouezer ket. E stomog fall a zistaol ar boued a gemer. Droug livet, treut, gwenn e benn araok an oad, bec'h d'ezañ o chom en e-sav, e ra kement a labour eget dek. E vagadurez a gav er bedenn, o lenn ar Skritur Zakr, an Aviel. En e greiz ez eus eun ene a dan hag a deu da entana kement den a zo ouz e zelaou.

Bez ez oa, a lavar d'eomp skridoù e amzer, eun toueller eneou. Warlerc'h e brezegennou, an dud a rede e-villierou d'ar manatioù. Ret e voe sevel eur gouent e Juilly, e kichen Meaux, evit ar merc'hed, aet o gwazed d'e heul. Pa dremene, ar mammou a stage o bugale, ar gwragez a rae an diaoul hag ar pevar evit mirout ouz o friejoù da vont d'e zelaou, gant aon ne vijent gounezet gant e gomzou.

Goude beza estlammnet evel-se an dud, Bernard a zistroe d'e vanati evit beva eno, evel an distera eus e venec'h.

Daoust ma veze dalc'hmatao o veac'h, Bernard a gavas amzer da skriva eleiz a levrioù kaer, a ro da anaout en doa desket muioc'h gant Doue eget o studia e-unan.

Epad ma pare gloar Tad Abad Klervo a-zioc'h er bed kristen, 'evel eun heol skedus, eur breizad, 12 vloaz yaquantoc'h egetañ, a lake e kalz trouz da goueza war e ano. Ar breizad-se oa **Abelard**, ginnidik eus bro an Naoned ha brudet kenañ evit e spered lemm hag ive, siouaz, evit e faziou.

En e gelennadurez, koulz hag en e skridoù, Abelard e skigne kredennoù nevez ha risklus evit ar feiz katolik. Klasket e voe digeri d'ezañ e zaoulagad, met en aner. Bernard a skrivas d'ezañ meur a lizer. Ar breizad, penn kalet, a jome aheurtet. Galvet e voe, er bloaz 1140, da zont dirak Konsil « Sens » d'en em zifenn. Bernard a deuas d'ar C'honsil. Eno, dirak roue Frans, eleiz a eskibien hag a dud a Iliz, Bernard hag Abelard, an daou spered bras, a oa bec'h ha diviz start etrezo. Abelard a voe trec'h. Dirak komzou ken eün, ken gouiziek, ken hegarat Abad Klervo, e plegas. E skridoù a voe kondaonet met Bernard a zalc'has d'ezañ e istim.

E Breiz, hepken, Sant Bernard a savas dek manati, hervez leor buhez ar zent an **Ao. Perrot**. Er bloaz 1129, a lenner ennañ, **Ermengard**, intañvez Alan Fergan, ha mamm Konan III, duk Breiz, a en em c'hreas leanez, e Larre, e kichen Dijon. Bernard eo a zigemeraz he le, ha goudeze e skrivas d'ez e estreded eur wech, hag Ermengard eo a zigoras hent da venec'h Klervo da zont e Breiz.

Er bloaz 1130, e savjont manati Itron Varia Begard, en eskopti Landreger ;

Er bloaz 1132, manati Itron Varia ar Releg Plouneour, en eskopti Leon ;

Er bloaz 1135, manati Itron Buzai, en eskopti Naoned ;

Er bloaz 1136, manati Itron Varia Langonnet, en eskopti Kerne ;

Er bloaz 1137, manati Sant Albin Pledeliac, en eskopti Sant Brieg ;

Er bloaz 1137, manati Itron Varia Boquen, en eskopti Sant Brieg ;
Er bloaz 1137, manati Itron Varia Vieux Ville, en eskopti Dol ;
Er bloaz 1138, manati Itron Varia Lannvau, en eskopti Gwened ;
Er bloaz 1142, manati Itron Varia Koat-Malouen, en eskopti Gwened ;

Er bloaz 1142, manati Itron Varia Mellerai, en eskopti Naoned.

E penn manati Buzai, sant Bernard a lakeas Nivard, e vreur yaouanka ; dont a reas da ober tro Breiz da welet penaos ez ae ar bed gant e venec'h, er bloaz 1144...

Gwelet a reomp, dre ar roll manatioù-se, n'eo ket bet sant Bernard eun estranjour evit hor c'hentadoù. Hen, hag a zo bet sklerijenn e amzer, a jom atao sklerijenn an Iliz. Dre e skridoù hag ar venec'h a gendalc'h da vev eus e spered, e chom atao beo en hon touez. Holl hor beus ezomm da vont d'ar skol gantañ da zeski skiant ar vuhez vat, ar vuhez kristen.

Fransizien dizoue, goude beza laeret manati koz Klervo o deus graet anezañ eur prizoun da zigemeret lamponidi ; eun druez hag eur vez eo !

Manati brudet Sant Bernard, eus eur baradoz m'eo bet, a zo deuet eta da veza evel eun ifern : Skeudenn ar bed paour-mañ, en deiz, ma ve lamet anezañ kelehnadurez an Aviel, ar gelennadurez-se a rae, ken brao, Sant Bernard d'e venec'h, war e dremenvan :

« Tri dra, emezan, am eus miret gwella m'am eus gellet hag a garfenn ho kwelet oc'h ober evel-dou : **atao am eus bet nebeutoc'h a fizians ennoun va unan eget em nesa ; p'oun bet gloazet, n'am eus biskoaz klasket gloaza an neb en deveze va gloazet ; evez am eus laket, muia, m'am eus gellet, en aon da rei skouer fall da unan bennak.** »

L. B.

BLEUN - BRUG BRAS KASTELLIN

PETRA 'vo Bleun-Brug Bras Kastellin d'an 31 a viz Eost ?
Eur gouel kaer en enor d'al labour douar.

Breiz en he c'haera a en em gavo, en deizioù-se, e Kastellin, evit enori douar hor Bro.

Difraostet eo bet an douar-se, gant Sent koz hor Bro, gant ar venec'h, 1.500 kant vloaz a zo bet. Deuet eo an douar-se, a nebeudou, da veza eun douar pinvidik dre nerz divrec'h ar Vretoned, ha gant o c'houezenn.

War an douar-se, Feiz hag ijin ar Vretoned, o deus lakaet da ziwan, eun eost puilh a ilizou hag a chapelioù dispar a strink war-zu ar Baradoz, ezans o zourioù mein, evel eur bedenn dibaouez ; warni, hor c'hentadoù o deus savet, a villierou, merk sakr hor silvidigez, kroazioù ha kalvarioù a bep ment, evel bleunioù peurbadus diwanet eus ar roc'h kalet m'eo an Iliz.

Bez' ez eo an douar-se, evidomp, evel eur relegouer santel, a zalc'h kuzet eskern hor c'hentadoù, hon tud veur, hor sent, hor c'herent da c'hortoz deiz bras ar rezureksion.



Kanerien skolaj Lannuon a vo e Kastellin.

PHOTO JOS LE DOARÉ

Bez' ez eo an douar-se, mammenn hor bara pemdeziek ha mammenn danvez ar sakramant a ro ar vuhéz a bado da viken.

Bez' ez eo an douar-se, evidomp, eun daolenn gaer a esperans hon dibrad war zu hor c'hrouer Galloudus, evel eul lec'h-gortoz, araok beza digemeret e Baradoz an Neñv.

EUR SKLERIJENN E VO AR BLEUN-BRUG

Eur sklerijenn e vo Bleun-Brug Kastellin war gement a sell ouz an douar. Rei a raio da anout darn eus Bugale Vreiz nevez aet da anaoun, hag o deus enoret gouenn al labourerien douar, dre o skridou.

D'ar gwener, an Ao. Bihan a gomzo eus ar Aotrou Conq (Paotr Treoure) hag en deus skrivet kement evit didui ar maeziou.

Per Bernard a gomzo eus Jakez Riou, mab Lothey, a gavas danvez « Geotenn ar Were'hez » en eur heulia red an dour war lez ar Ster-Aon.

An Ao. Lohier, a lavaro eur ger eus ar gwenedad, Loeiz Herrieu, eur gwir vab da Zouar Breiz.

Leon Toulemont, d'ar sadorn vintin, a roio da anaout Tangi Malmanch, brudet bras dre e beziou-c'hoari, evel « Gervan », hag « ar Baganiz ».

Goude e vezo prezegennou diwar-benn al labour-douar :

An Ao. J. Le Duigou a zisplego, da 10 h. 30, amzer da zont an douar e Breiz ; Anna Bellec, da 14 h. 30, a lavaro petra eo bet, petra eo, ha petra 'vo buhez ar merc'hed war ar maez ;

— An Ao. de Guebriant a ziskouezo pegement eo aet al labour-douar war-araok, e Breiz, abaoe eun nebeut bloaveziou.

EUR MOR A GAN HAG A LEVENEZ

D'ar sul vintin, etre 8 h. 30 ha 10 h. 30, evit al lazou-kana : er patro hag en ti-kêr, hag evit an holl re ah, e skolaj Sant Loeiz, e vo ar c'honkourioù : Lenn, displega, kana, konta, prezeg.

Digor int d'an holl. Ar re a gar a c'hell mont da welet. 28 priz kenta etis ar re gaera a zo da c'hounit.

Lodenn ar bedenn a vez bras ha frank, er Bleun-Brug. Breiz a bed, Breiz a gan, Breiz a goroll, Breiz a c'hoari, Breiz a labour, setu petra ' vo Bleun-Brug an douar.

EUR PARDON KAER

Da genta d'ar sadorn da noz, e vo eur veilhadez war ar menez, e sioulder an noz, el lec'h ma vo roet « Pastoral koz Poullaouen », gant Kelc'h-Keltiek Poullaouen, ha « Kan en noz » gant Kanerien Landi, ha Kanerien vihan Lokournan ; goude e vo prosesion ar Goulou, a gaso an dud, en eur gana « Kantig ar Baradoz » ha « Pegen kaer ez eo mamm Jezuz » war lez ar Ster-Aon, da glevet an Oferenn hanter-noz, a vo lavaret war an dour, gant an Tad Colliot, Abad Kerbeneat-Landevenneg. Ar brezegenn a vo graet gant an Ao. chalon Coadou, Superior Skolaj Lesneven.

D'ar sul, da 10 h. 30, war ar Menez adarre, e vo kanet an oferenn-bred, gant an Ao. 'n Eskob Bellec, eus Gwened, ha prezeget gant an Ao. chalon Guivarc'h, person Landi.

Kanerien vihan skolaj Lannuon, barreka « manécanterie » a zo e Breiz, a roio ar c'han gant skoazell an holl lazou-kana a vo er Bleun-Brug. Eun dra hep par, e vo, bezit sur, klevet an oferenn-bred-se : Breiz en he c'haera, o pedi Doue, war lein eur menez glas.

KOROLL HA KAN AN DOUAR

Da 14 h. 30, e Maner Touil-ar-C'hoat, e vezo eun abadenn vras.

Da genta : Kan al loreidi.

Da c'houde : Abadenn vras, « Korooll ha kan an douar » c'hoariadeg, gant Bernard de Parades, gant skoazell, Kanerien Sant-Vaze Kemper, ha Kanerien Landi. E-keit ha ma kano an daou laz-kana-mañ, e vo gwelet o tremen war al leur-c'hoari, micherioù al labour-douar, gant ar sent, an dud, al loened, ar binviajou... 1.500 c'hoarier : eun dra ha n'eo ket bet gwelet c'hoaz.

Warlerc'h e vo prosesion vras al labour-douar a vo enni Breiz a bed, Breiz a gan, ha Breiz a labour, dindan sellou Sent an douar.

Ar gouel a vo klozet, gant bennoz ar Sakramant hag eur ger gant an Ao. 'n Eskob Fauvel.

SINEMA

Roet e vo ivez ar film « Mister ar Folgoat » a zo gantañ kement blaz ar Bleun-Brug. — D'ar yaou da noz e sal ar Patro, ha d'ar sul da noz, er Petro hag en ti-kêr, da 21 h.

Ouspenn, e-doug ar gouelioù, e vo eun diskouezadeg war ar vro Rouzig.

Setu petra ' ginnig. Bleun-Brug Kastellin d'ar Vretoned d'an 31-1^o ha 2^a viz Eost.

N'eus ket da lavaret nann, pep gwir Vreizad a vo e Bleun-Brug Kastellin.



Kenteliou d'an dud yaouank

III. — WAR HENT AN DIMEZI

Eun dra a bouez eo an dimezi.

Sonjal er pod da virvi ? Sonjal dimezi ? Nemet ha mont a rafed da veleg, da vanac'h, da leanez, ar sonj-se a savo en ho spered. Goude oad ar c'hoari, e teu hini an dimezi. « Aesoc'h dimezi eget sevel ti », a lavar lod. Muioe'h a breder a zo koulskoude da lakât gant an dimezi. Eun ti a c'heller dresa, bihanaat, kreski, uhelaat, freuza, cheñch hini. Dimezi, evit Bretoned a ouenn vat, a zo dibab amzer da zont daou zen, da nebeuta, ha peurluvia, hini daou, tri hag ouspenn. Rak dimezi a reer evit kaout bugale. Eürusted ar gerent a ra eürusted ar vugale. Araok ma vez ganet ar vugale eo e ranker sonjal en o eürusted, araok an dimezi eta.

*An dud yaouank pa zimezont
Ne sonjont ket petra reont.*

Ma vefe gwir ar c'homzou-se e pep giz, piou alies a vefe da damall ? An tad hag ar vamm. D'ezo eo heñcha o bugale pa vezont deuet en oad ha pa sonjont dimezi.

Pa welan er foariou an dud o trafika kezek, saout, moc'h pe eun dra bennak all, o vont, hag o tont, o sellout piz, trei, distrei, chipotal, beza nec'het a-raok ober o menoz, e sonjan ez eus tud hag a laka nebeutoc'h a breder araok kemerout pried. Sonjal a ran ez eus Stud-book evit ar c'hezeg hag ar saout ; sonjal a ran :

*Diouz peb troad n'eo ket mat pep botez
Na diouz pep gwaz mat pep maouez.*

Petra da glask ?

Lod a glasko gened ; lod all a glasko gouzout hag e vezo pounner sac'h an argourou. Furentez ? lakit an dra-se war ar marc'had war gorre ar sac'h. Koulskoude « gwelloc'h eo paotr fur ha paour, eget penn-skañv gant e vern aour ».

Hogen peadra ha furentez a c'heller kaout a-wechou ha gened ouspenn.

« Eun tammig peadra a zo eur c'hleñved mat da baka. » Ne lakay ket muioe'h koulskoude a garantez da ziwan e kalonou ar priedjou, pell diouz eno, sikour a ray da gaout aezamañchou ha n'or ket evit ober fae warno. Ne c'heller ket epad ar vuhez « frita laouen ar baourentez war billig ar garantez ».

Ar garantez eo ar penn kenta ; rak an dimezi n'eo ket eun trafik eo.

*Gwell eo karantez etre daou
Eget madou leun ar c'hraou.*

Furnez ar geiz a lavar c'hoaz diwar-benn an dimezi :

*Gwelloc'h kalon vat ha tener
Eget arc'hant leiz ar baner.*

*Dibaot eo gwelet ar prodig
O chom pell amzer pinvidik.*

*Dibaot ivez eur feneant
A zastumo kalz a arc'hant.*

Kenteliou fur a ro ar re goz diwar ar pezh o deus gwelet.

Ar yec'hed.

Souezus eo ne ve ket kavet krenn-lavar ebet o venegi an teñzor dispar a zo anezañ ar yec'hed !

Ar gened a deuzo a-benn nebeut bloaveziou. Ha kaout a ra d'eoc'h e pado an eürusted a c'hellfe an arc'hant digas ma ne z'eus ket a yec'hed ? Servichout a ray da gaout war ho tro medisined ha da brema louzeier. Diboaniet e vezot diwar-se... marteze.

Fallgaloni a reer buan o veza klañv pe re alies pe epad hir amzer. Ar feneant e-unan, ne blij ket d'ezañ beza klañv war e wele ; ar yec'hed avat a dalv d'ezañ da gemerout plijadur gant e dech fall.

Ha kaout a ra d'eoc'h ez eo mat da labourat eun den hep yec'hed ? En despet d'e volontez gwella n'eo ket gouest da labourat ; an treac'h a chom atao gant ar c'hleñved. Ar c'horf a zo evel eur mekanik, n'eo ket evit mont endro ma 'z eus eun dra bennak distreset ennañ.

Met, bez ez eus ive tud lezirek ha n'int nemet tud klañv.

Tud a lavaro : gant ma pado ar garantez.

Daoust pegen bras eo ar garantez etre daou bried, kredi a ran ne chomo ket epad bloaveziou ken birvidik hag en devez kenta, etre daou zen unanet, evit dougen samm ar vuhez ma vez ar samm atao war gein ar memes hini, unan o veza yac'h, egile o veza klañv pe glañvidik atao. Rak diaes eo lakaat eun den yac'h da gredi n'eo ket gouest eun den gwan ha sempl d'ober kement hag heñ. Hag a nebeudou e tiwano ar rebechou, louzou treñk ha c'houero, mat da wasaat stad ar c'hlañvour ha da lakaat teuzi ar garantez a nebeudou.

Eul lezenn nevez.

Eul lezenn a zo nevez savet hag a lavar ez eo ret hiviziken d'an neb a c'hoanta dimezi rei d'an ti-kêr, araok an eured, eun testeni, da ziskouez ez eo bet o kaout eur medisined. Evit senti ouz al lezenn an dud yaouank a ya eta da gaout o medisined. Al lezenn ne c'houlenn ket digant hemañ diskleria ez int pe n'int ket yac'h a gorf hag a spered hag e stad da zimezi. Dre-ma ne c'hell lavarout war e desteni nemet en deus gwelet an hemañ-hen hag ar plac'h-mañ-plac'h, an testeni a zo didalvez ! Eur c'hoari ! Hag an holl a oar ez eo eur c'hoari. Setu perak ne zeu an dud nevez da glask o « sertifikad » nemet dere'hent an eured pe devez an eured. Ar medisined a zoug warnañ : « Evit senti ouz al lezenn, X. Y. a zo bet hizio o welout an D' Z. » ha netra ken. Ha pa anavesfe eun dra bennak da virout outo da zimezi, al lezenn a zifenni outañ heñ diskuilh, evel ma ne c'hell ket eur beleg diskuilh ar pezh a glev er gadorgofez. O welout dimezi tud hag a anavez mat, pet gwech en deus soñjet ar medisined en darvoudou a c'hoarvezfe er familh nevez abalamour d'ar pezh a oar, heñ, hag heñ hepken alies. Mut e rank chom.

Ha ma vefe roet an testeni gant eur medisined ne anavez nag an dud yaouank, hag o c'herent ? Ne dalvezfe ket atao kalz hiroc'h. Traou ha traou all a vefe gelllet nac'h ha kuzat outañ.

Ral tre eo ez afe eun den yaouank da c'houlenn kuzul digant e vedisined araok dimezi. Eun dra vat e vefe koulskoude.

Aes eo e guzulia ma 'z eo yac'h. Ma n'eo ket, avat, ha ma vez lavaret d'ezañ gedal, ar goure'hennenn a jomo peurliesia da c'houre'hennenn ha netra ken. Ha ma lavarfe ar medisined : Eun dever a goustiañs eo evidoc'h chom dizemez dioustu e respontfe : An dra-se ne sell ket ouzoc'h !

Medisined oun war ar maez, ouspenn tregont vloaz 'zo. Kredi a c'hellit em eus gwelet meur a dra vantrus. Keit ha ma vin beo em bezo soñj eus eur plac'h yaouank flamm, re flamm an holl, hag a oa meneg edo o vont da fortuna. Ne oa bet embann ebet c'hoaz pa zeuas d'am gwelout evit eun draig ha na virfe ouz den da zimezi. Hogen, traou all a wellis. Ha me da c'houlenn « Ha gwir eo

emaoc'h o vont da forñia prestik ? » « Ya, emezi, an embannou a zo da vont disul kenta. » « Disul ? emeve, ho piz a vezo pare abenn devez an eured, ar rest avat ne vezo ket ha skuizder ar sizuniou a zeu ha dreist-holl skuizder an devezioù warlerc'h an eured a ray muioc'h a zroug eget a vad d'eoc'h. N'ho pefe ket gellet gedal ? » Ne jomas ket da glevout hiroc'h.

Chom mut a rankis. Mes pa glevis ar c'hleier eured e sonjis : « Abenn pegeit e klevin kleier he interamant ? Nebeutoc'h eget bloaz warlerc'h e voe kañv d'ar wreg yaouank ha d'he bugelig war eun dro.

War va sekret em boa berniet, evel boaz, rebechou an diou familh.

Beleien a zo bet gwelet ive alies goloet a bri gant teodou fall hag a vefe bet ken aes d'ezo en em gempenn anezañ... panefe o doa da zerc'hel ganto, betek mervel ouz red, eur sekret e dounder o c'houstiañs.

N'eus fors penaos eta e vezo savet al lezennou ; ne vezo ket an holl dimeziou direbech e keñver yec'hed ar priejou, bet bizitet gant eur medisin, rak n'eus medisin ebet ha ne fazife.

Kosa den am eus anavezet a oa o vont da gregi en e gant vloaz. Konta rae d'in ez oa bet kavet ken dister ez yaouankiz ma'voe kaset eus kêr da vaga war ar maez ha da jom eno. Peadra he doa e familh ; ne voe kavet mat na da vont da zoudard, na da vont da vartolod, o veza ma veze diskleriet, bep tro ma wele eur medisin, edo e riki da baka an tuberkuloz, da vont dre uz, ha ne jomfe ket beo pell amzer, ne reas kouls lavaret netra epad e vuhez.

Ha me da respont d'ezañ : « Peogwir hep yec'hed, hervez ar vedisined, da vihana, ho peus gellet paka 100 vloaz, betek pe oad ho pefe bevet m'ho pefe bet yec'hed ? »

— Ar vedisined a c'hell eta fazia war kleñvejou a zo. Koulskoude kleñvejou a zo heg a dlefe mirout ouz an dimezi dre o natur, ha lod all abalamour m'int re groget er gwad.

Kuzulioù ar vedisined a zo mat da glevout. Eun dra all eo-lakaat an dud d'o heuilh.

Eun den yaouank eta dame'houllo roll e argourou n'eo ket paour gant m'en deus yec'hed. Yec'hed a zo ret evit labourat a-zevri. Diwar al labour e teuo arc'hant d'ar gêr. « An arc'hant deuet diwar c'houezi eo ar gwella hini. »

Nebeutoc'h a drabas hag a boan spered eta warlerc'h dimezi, muioc'h a eürusted, ma vez soursiet eus stad ar yec'hed araok dimezi. Koulz evit an dud hag evit ar chatal : « ar ouenn a denn ». Dimezi a reer gant fiziañs da gaout bugale. Arabat fiziout kaout bugale direbech o gwad diwar gerent taget gant an naplez, an tuberkuloz, diwar gerent boesouner, diskiant, lous ha kement-zo.

Ar gwella kuzul a oufen rei d'eoc'h yaouankizou eo : Sellit en-dro d'eoc'h.

L. L.



EUREUJOU

Da Vercher Fask eo bet eureujet e chapel goz santez Anna ar Palud hor Mignon mat Yann ar Minor eus Pont-n-Abad, sekretour jeneral ar Bleun-Brug, gant an dimezell Maria-Madalen ar Gall eus Dinan. Bleun-Brug a zo eürus o kinnig e wella gourc'hemennou d'an daou bried yaouank, hag ne gav netra gwelloc'h da zisplega e vennoziou eget ar barzoneg-mañ, bet kaset, eus an harlu, d'an daou bried nevez gant Laouenanig Breiz.

Petra 'welan,
Petra 'glevan,
Barz iliz koz ar Palud ?
Eur mor a gan,
Eur mor a dud,
E kêr Mamm-goz Arvor,
War lez ar mor.

Kleier, kleier !
Perak e sonit ken sklintin,
'Vel eur bedenn,
Us d'an tevenn,
D'ar merc'her Fask-mañ ken mintin ?
Peseurt keleier,
Lavarit d'in,
A red un tevinier
Ken mintin ?

Perak e klevan ar mor bras
War drézenn wenn Santez Anna,
O luskellat e donnou glas,
'Vel mouezioù flouret o kana ?

Perak e klevan ar biniou,
Dre an oabl sklêr a-us d'am fenn,
Perak e welan koufeou gwenn,
Ha gwiskamantou a bep liou ?

Perak e welan kement a dud
Er Palud,
War lez ar mor
E ti Mamm-goz Arvor ?

Perak, perak kement a dud ?
Perak ken laouen pep kalon ?
Perak e voutc'hoarz ar Vamm-Goz
'Vel ma vefe deiz he fardañ ?

Perak, perak kement a dud,
Tud ar Bleun-Brug,
War lez ar mor
E ti Mamm-Goz Arvor ?

Selaou, selaou, Mabig karet,
Herio an deiz,
Eur mab a Vreiz,
Em zi amañ 'zo eureujet.

Dimezi 'ra Yann ar Minor
War lez ar mor,
E ti Mamm-Goz Arvor.

Santez Anna, Mamm-Goz hor Breiz.
War benn an daou bried nevez,
Skuilhit yec'hed, peoc'h, levez,
Ma chomint unanet noz-deiz,
Skoulmet o c'halon, o ene,
E karantez Bleun-Brug ha Breiz,
E karantez Doue.

Laouenanig Breiz.

D'ar 4 a Vezeven ez eus bet eun eured all ken kaer e Santez-Anna-r-Palud : eured Erwan Mocaer, mab d'an Aotrou Per Mocaer, is-rener ar Bleun-Brug, gant an Dimezell Michelle Troyaux eus Paris.

Koulz hag eured Yann ar Minor, liou ha buhez ar Bleun-Brug a zo bet gant an eured-se, prezeget gant an Ao. Chaloni Batany. Ra vo gras Doue hag an eürusted war ar familh nevez, ha ra vleunio enni spered Breiz ha Feiz koz hon Tadou.

Kelou laouen

Marinaik, Gweltas, Soazig hag Armela Bernez eus an Oriant, a gemenn d'eomp ganedigez o breur Erwan. Buhez yac'h d'ar paotrig d'e vreudeur ha c'hoarezed, ha gourc'hemennou d'ar gerent.

Mari-Annaig, Ewan hag Hervo Olier a gemenn ive ez eus bet ganet d'ezo eur c'hoar Rozenn. Peoc'h ha levez d'an holl.



*Salaün ar Fol a zo douaret elec'h m'eo marvet :
en koad Lesneven.*

Jarl Priel, a c'hoarias Salaun ar Foll, a lavar d'eomp penaos eo bet savet "MISTER AR FOLGOAT"

KENVROIZ KER,

Ar fil-man a zo bet aozet evit ma vo kanmeulet dre holl eur paour, eun denig distar na oa perc'henn da neira, eun den a veze graet goap dioutañ a-hed a-hed e vuhez. N'eo ket bet c'hoariet gant Aotronez hag Itronazed holl-vrudet, e vez lennet bemdez Doue o ano er gazetennou eus an eil penn ar bed d'egile. Nann, savet eo bet gant eur bobl a bez, gant labourerien douar, micherourien pe vourc'hizien eus Plouneour-Trez, Lannilis, Brest, Landerne, Landivizio, Plouzeniel hag ar Folgoat, paotred ha merc'hed, bugale ha tud koz, ha zoken gant o c'hezeg, o saout, hag o chas.

Me va-unan, evidon da vezañ skrivet meur a bez-c'hoari e galleg hag e brezoneg, evidon da veza c'hoariet alies du-mañ ha du-hont, ne oan ket ken-nebeut-all eun den a vicher, evit pezh a sell ouz ar sinema.

Bale a raen e Plouneour-Trez, dierc'hen ha diskabell ar peurliesa. va baro livet en ruz, ha va bleo 'ta, va Doue benniget, eur vez hepken sellout outo, eur sac'h ganin a-dreuz va skoaz, hag eur pikol pezh baz em dorn. Biskoaz n'am bije kredet en em ziskouez er stad-ze em Bro-Dreger, rak graet e vije bet

al lu ganin, redet o dije ar vugaligou war va lerc'h hag iset e vije bet zoken warnon ar chas.

Du-hont ivez, da vihana da genta, e c'houllenne ar gwraegz an eil digant eben : « N'hoc'h eus ket gwelet ar c'hasker bara-ze o vont hag o tont e-kichen ar presbital. Hennez, moarvat, a zo o klask tu da laerez yer, pe gonikled, pe viou, ar seurt a c'hello paka da vounta en e sac'h ».

Met abenn eur pennadig, degemeret e vezen gant an dud-ze, n'eo ket evel eun estren deut eus a-bell da c'hoari Salaün ar Foll, met evel Salaün ar Folgoët, an hini gwirion, deut endro da veo, ha komzet e veze ouzin gant doujañs ha gant karantez. « N'hoc'h eus ket riou, Salaün baour ? Penaos emañ ar bed ganeoc'h Salaün gaez ? »

Eur wech e c'houllennas eur vaouez digant person ar barrez : « Va Doue, Aotrou Person, emezi, pelec'h an diaoul oc'h bet o klask ar Salaün-ze ? Ma ! n'ho pije ket gallet kavout gwelloc'h rak diouz e welout, berr-berr e tle beza spered ar paour kaez. »

Eun dervez eus ar mintin, pa oamp o labourat e-tal chapelig Gwikelo, pedet e oabet seurezed Plouneour da vont du-hont ganimp da wiska e leanezed merc'hed yaouank eus ar vourc'h. Echu ganto o labour, setu ma fellas d'ar seurezed kemer ivez eun tammig perz en abadenn, ha pa c'houre'hemennas hor rener Herri Kaouissin : « Allons, les bonnes sœurs, en avant ! » Kerzout a reas va leanezed er penn-araok, en eur c'hoarzin a greiz kalon. Ha Herri neuze da lammat warno ha da gana dezo ar gousperou war an ton bras : « Petra, emezañ, daoust hag emañ breman ar c'hiz e-touez ar seurezed da vont en eur c'hoarzin d'an oferenn ? Arsa, biskoaz leanez n'hoc'h eus gwelet en ho puihez ! » Ha setu mezeg ha glac'haret meurbet ar paour kaez pa voe bet lavaret dezañ ne oa ket o vlejal war verc'hed treuzwisket, met war leanezed penn-kil-ha-troad.

Pa voen bet tennet er maez ar bez, rak interpret oun bet, ha da vat, ha gant tud a vicher, rak bez e oa en o zouez paotr an toullou er barrez, e tiredas d'am bete merc'hed yaouank da naetaat va zruilhou mastaret gant pri ha douar, ha da bedi ac'hanon en an' Doue da zont da eva eur banne kafe aozet evidon, rak yen daonet e oa an deiz-ze. Neuze e stagas o zad da grial warno : Ha diskennit, mar plich, eun dakenn vat a hini-krefiv d'ar paour kaez Salaün ».

Evel holl vignoned an Aotrou Doue, karout a rae Salaün al loened munut. Divizet e oa bet rei d'in eur c'had war va harlenn, ha pedet e voen bet d'ober cher dezi. Allas, tanfoelt gad ebet ne voe kayet ha gwell a ze, rak n'oun ket kustum da bledi gant ar seurt loened hag aon am boa na stagje va gad, dre winkal ha difrêta, da skrapat va douarn pe zoken da ziwada va fri. « Ha ma rofemp dezañ, emezo, eun oanig bihan ? » Siwaz, ne oa ket ar c'houlz d'an deñved da gaout re vihan. Rankout a ris 'ta tremen gant gleskered. Dre forz patouilhata e fank eur baludenn, e kichen Guipavaz, e teuas Ronan Kaouisin a benn da dapout pevar glesker. Eun dorn kuzet dindan geot hag ileo a zalc'he krog e treid a dreñv al loened ze, e-keit ma oa Salaün o tebri bara glebiet e dour e feunteun. Met n'hor boa ket taolet evez war eun draig : gleskered hor bro a zo ken kalet o fenn hag hon hini, holl Vreiziz. N'ouzon ket pegeit amzer hon eus kollet o teski dezo lammet war an tu ma vezer en gortoz da welout anezo o tont. Kent na vo pell, gwelout a reot war al lien eur skeud o tremen evel eul luc'hedenn, unan eus ar pevar glesker milliget, unan hepken, peurzisket gantañ da vat e gentell.

Degouezet eo d'eoc'h, emichans, lavarout : « Va Doue, pegen-kreiz eo ar vuhez-mañ ! » Ac'hanta, kalz diaesoc'h eo c'hoaz beza maro. Pa zeuas va zro da vont da anaon, epad eur pennadig evel just goulennet e voe bet diganin chom eur vunutenn, da vihana, hep ober an distera fin, hanter-zigor va genou ha hanter glozet va daoulagad. Eur vunutenn ne bad ket pell, e kav d'eoc'h. A ! Nann ? Chomit 'ta evel-se e-pad eur vunutenn, e-keit ma vo eur fubuenn oc'h aesa en em sila en ho fri pe en ho kenou !...

Warlene, hen gouzout a rit marteze, c'hoariet am boe e Landreger roll Sant Erwan, ha bremañ, dibabet oun bet da c'hoari roll Salaün ar Foll. Da lavarout eo, lammet am eus an eil sant d'egile. Met daoust da ze ne vo ket graet eur sant gant eur pec'her bras evel doun pa vin aet er bed all. Met n'eus forz, spi am eus d'en em sila dre laer er baradoz, e-keit ma vo troet e gein gant Sant Per, hag eno e kavin marteze eun tammig korn e kichen Salaün ar Folgoat ha Nikolazig eus Keranna, hag e-pad an eurusted beurbadus, spi am eus da welout eno en dro d'in e ment mignon a zo amañ ouz va selaou. Ha peogwir ez oun troet da gomz evel eun den santel, fellout a ra din echui va frezegenni evel ma ra ar veleien er gador-sarmon : Va breudeur ha va c'hoarezed ar Bleun-Brug, evelse bezet graet !

Jarl Priel.

Film Salaün ar Foll a gendalc'h da redet ar parrezioù hag an dud da redet war e lerc'h. Deuit d'ar Bleun-Brug da Gastellin, hag ho pezo tu d'e welet, d'ar gwener ha d'ar sul da noz e sal ar patro hag en Ti-kêr.



SIVI PLOUGASTELL

Ton : Eul labousig er c'hoad.

Plougastell 'zo brudet dre holl e-barz ar bed,
Evit e sivi kaer a gaver mat bepred.
Gwelit, er parkeier, pegen stank ar sivi,
'Vel steredennou ruz, en heol o lugerni.

Ouz troad ar goloenn, dindan an edou rouz,
E kreskont da genta, gwaskedet-kaer, didrouz,
War o deliou tener ar falz a dremeno,
Ha goude, dre ar park, ar sivi a redo.

Ar sivi a redo, war an douarou druz,
Ha d'an nevez-amzer a zougo frouez ruz,
Ruz evel muzellou ar Blougastellez koant,
O c'hutuilho laouen, daoulinet kreiz an ant.

O sivi Plougastell ! c'houi 'zo d'in em genou,
Eun eienennig fresk, saourus he dourennou.
D'am zeod ken kizidik, c'houi 'zo 'vel voulouz flour,
Voulouz leun a c'houez vat, a redek evel dour.

Laouenanig Breiz.

(Savet evit Bleun-Brug Kastellin.)

Er miz a zeu, e kavot amañ, kanaouenn an avalou-douar, savet ivez evit Bleun-Brug Kastellin, gant Yeun ar Gow.

C'HOARZOMP

EUR GWIR LEONAD

Gant eun nebeut bleud, meskit eur vi bennak, hollen ha sukr. Lakait ar meskaj-se enn eur sac'hig. Taolit ho sac'hadig en eur pod ennañ o virvi ar soubenn gig. Poaza a ray ha c'houeza, e-pad ma korollo ar c'haol, an irvin, ar c'harotez hag ar panez en-dro dezañ. Hag evelse ho pezo fars. Meuz dispart gant eun drailhenn gig druz tomm ! Voulouz d'ho kalon !

Ha bremañ e komprenoec'h ervat respont eul Leonad bihan :

« — Va faotrig, piou a garez ar muia : da dad pe da vamm ? — Kig ha fars ! » Hennez ne oa sur berad gwad kernevat ebet en e wazied ! Eul Leonad 100 % !

EUL LAPIN NIJER

« Yann, eme Bêr, eul lapin a zo war ar c'hae, e park ar ruta, e-kichen an ti. — Bennoz Doue dit. Ne vin ket pell oc'h ober dezañ e afer. »

Ha Yann da gregi en e fuzuilh, ha buan war du ar ruta. Gwir en doa lavaret Pêr ; bez' e oa eno eur c'honikl, e benn troet ouz an avel. Ne welas ket Yann o tostaat. Tenha a reas ar chaseour, hag al loen... a nijas en eur spernenn-du. Ha chom eno, e benn d'an traoñ. Redek a reas Yann davetañ. O, maro mat e oa ! Abaoe eun nebeudig amzer zoken ! Ne oa anezañ nemet eur c'hroc'hen-lapin chouket ennañ eun dournad plouz ! Ha Pêr a c'hoarze en ti, par ma c'helle !

GWAD SKOSAT

« — An Amerikan hoc'h eus roet dezañ eus ho kwad a ginnig d'eoec'h mil dollard », a lavaras eur medisin d'eur Skosat. — « Eun den savet-mat eo », eme ar Skosat.

Nebeut goude e voe ret adarre sila gwad nevez en Amerikan. Ar Skosat en em ginnigas c'hoaz. Ha kant dollard a resevas a-berz ar c'hlañvour.

Eun trede gwech e roas eus e wad d'an Amerikan. Hag ar wech-mañ ne c'houezas nemet eur « Bennoz Doue ! »... « Tra ken ? Perak 'ta ? — A, va den mat, eme ar medisin, n'eus mui en Amerikan nemet gwad skosat ! »

AMZER 'ZO !

« Ho tri oc'h kondaonet d'ar groug. Nemet aotreet oc'h da zibab ho kwezenn. »

« — Me », a lavaras Yann Saoz, « me a c'houlenn beza krouget ouz eur wezenn-bupli, an uhela a gavoc'h. »

— Eun dervenn », eme, rok, Mak Gregor, eur Skosat.

Padraig, an Iwerzonad, ne ranne grik.

« — Ha c'houi, Padraig ? — Eur bod-spezad evidon, mar plij. »

— Re vihan eo ! — Amzer am eus. Laouen e c'hortozin anezañ da greski. »

GWIRIONEZ

Ret eo adsevel foar P... An ti-kêr a brometas goprou evit ar c'henta marc'hadou graet war ar marc'hallac'h. Bruderez a oa graet er c'helaouennou ha dre skritellou... Ha buoc'h ebet ne zeuas. Neuze eur c'henwerzour a redas da di eur c'houer o chom er vourc'h. Dont a reas a-benn da lakaat anezañ da zegas war ar blasenn e bemp pe c'houec'h buoc'h. Hag antronoz e weled war ar c'hazennou eul luc'hskeudennou (foto), merket dindani :

EUR C'HORN EUS MARC'HAD AR SAOUT E FOAR P...

MADIGOUG PEGUS

Dedennet e oa Yannig hag Alanig war-du ti ar c'here, o c'henderv. Eno e oa madigou, melen-rous evel sukr-dev (karamel).

« Kemerit unan 'ta, bugale », a lavaras dezo paotr al lér. Yannig, ar yaouanka, a gasas prim eul « limig » d'e c'henou. Gant ar wrez e teuzas ar madig... Diylaz... Ha neuze e pegas start ouz staon ha muzellou ar bugel. Pega 'rae, peogwir e oa... PEG !

KARANTEZ EVIT AN ENEBOUR

« — Setu te mezo adarre, Yann ? Gouzoût a rez koulskoude ez eo al lambig unan eus gwas a enebourien an den !

— Ya, ya, Aotrou Person. Met tost bep sul emaoe'h o lavarout deomp ez eo ret karout hon enebourien...

— Met n'am eus morse lavaret lonka anezo l...

O TASTUM AVALOU-DOUAR

Bec'h a zo er park. Ne sav ket an dud o c'hein evit teurel an avalou-douar war-du ar bern.

Hogen ne diz ket an holl ar berniou ? Darn a « denn » re hir. Hag eur voereb da lavarout, p'emañ ar c'houlz da zastum an avalou-douar er seier : « Sur, amañ emañ ar f... gant unan bennak. »

LABOUR KALET

Da unan eus paotred « Kompagnunez an heol », azezet war moger lenn Pont-n-Abad, e lavare mestr ar Velouri :

« — Dont a rez du-mañ da zastum avalou-douar ?

— N'oun ket evit mont. Dao eo din sikour Jakez Pao-Pin.

— A ? Petra 'ra da gamarad ?

— Netra !

DIMEZIT 'TA !

Ma fell d'eur C'hameronad dimezi, ez eo ret dezañ paea « argourou » d'e dad-kaer. Betek 200.000 lur, hep konta ar « profou » : givri, gwin, dilhad, lien, armou, h.a... Profou d'an tad ha d'an holl gerent ; betek ar gendirvi.

Eur « penn-bras » a lakaas e vere'h e gwerz. An den nevez a rankas paea evit kaout anezi : 200.000 lur, eur c'hamion ha teir buoc'h !

KEMENERIEN

En eur gêrig goant en doa eur c'hemener lakaet war gwerenn e di :

YANN, GWELLA KEMENER BREIZ.

Dirak ar stal-mañ e oa o chom eur c'hemener all. Petra ober ? Ne darzas ket e empenn gant al labour-spered. Petra aesoc'h da gaout eget :

JAKEZ, GWELLA KEMENER AR BED.

Ya, met eun trede kemener a oa er ru-se. Hag hemañ, petra e skrivfe war taibenn e voutig ? Goude prederia eun tammig ez eas, en eur vouch'hoarzin, da welout al liver evit goulenn ar skritell-mañ :

PÉR, GWELLA KEMENER AR RU.

K. Riou.

PEGEN BRAO BEZA MÊR !

Marc'harid a ya gant an hent,
Rodell-dirodell evelkent :

Droug 'zo enni war a weler.

Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

'N em gaout a ra Charlez ganti
Ha setu, e-ser beaji,
Ma ra pep hini e zeher
Da beñseliat chupenn ar Mêr.

« Me a oa dleet d'in kaout pê.
« Ma n'am eus ket, c'houi a oar
A lare Charlez d'e gomer, [ze »,
« Piou a zo kêz ar Mêr ?

« Met ma faperou' zo chomet
« E-barz an ti-kêr da gousket ;
« Anezo ne vo klevet ger.
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

Marc'harid ive en em glemm,
A lavar eo treut he zoubenn.
Ya ! ma ne c'hell ket troi ar ber,
Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« N'on mui », a lavare Charlez,
« 'Vit kaout bara d'am ziegez ;
« Ret e vo d'in troka micher.
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Mar d'eo ret d'in pêa tailhou,
« Ma rankan ober deveziou,
« Ma kresk d'in bep bloaz ma foñ-
[cher,
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Kement tra am bez da werza,
« O friz bemdez a izela,
« Ar pez a brenan a zo ker,
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Pa rankan monet d'ar marc'had
« E vez ret d'in bale war droad
« A-dreuz ar pri, a-dreuz ar flêr.
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Ma 'z eus kement a vouilhennou,
« A bri melen, a gochellou,
« Evit monet betek ma c'hêr,
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

— O ! ya », eme Varc'haradig
He deus eur galon gizidik,
« Truez am ez ouzoc'h, komper.
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Ma vez ker yen e-pad ar goañv,
« Ha ma suilh an traoù diouz an
[hañv,
« Ma vez fall an nevez-amzer,
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ?

« Ma vez grizilh hag avel but,
« M'o deus kement a boan an dud,
« Ma sav koumoul e-barz an êr,
« Piou a zo kêz nemet ar Mêr ? »

Kentel

Kein ar Mêr 'rank beza kalet,
An holl droug warnan 'vo lakê.
Kablus e vo e pep amzer.
O pegen brao eo beza Mêr !

Evit roi d'ezañ eur gentel,
Holl bec'hejou pobl Israel
War e gein a gouezo pounner,
O ! pegen brao eo beza Mêr !

Ao. Henry.



Maro eo Loeiz Herrieu

Mervel evit ar vro a zo eun dra gaer ; met rei d'ezhi labour talvoudus, bloaveziou hir eur vuhez a-bez a zo kaeroc'h c'hoaz.

E-pad ouspenn hanter-kant vloaz, Loeiz Herrieu en deus roet da Vreiz, e galon, e spered, e nerz, e amzer, hep arzao, dizoursi eus ar gounid hag eus an enor, hep beza bet digollet alies gant eur ger a drugarez.

Ganet e Kaodan, e-tal an Oriant, er bloaz 1879, en eun tiegez peizant, Loeiz Herrieu en deus mennet chom peizant betek e varo. Dalc'het en deus eun dachenn, e Lannester, araok donet da chom, er bloaz 1922, er penker-se a anaveze an holl Vreiziz : ar Gernevez-Henbont. Ha pa 'z eo bet skarzhet eus e dachenn ken karet, dalc'het en deus da labourat douar en e liorzig distier eus an Alre, evit beza fidel dalc'hmat d'an ano-se en doa choazet en e yaouankiz : Ar Barz Labourer.

Abostol nerzus ha gredus, labourer en deus evit e vro, evit miret d'ezhi teñzor he yez, he giziou, he gwiskamanchou, e sonennou, evit goarn d'ezhi, teñzor hep par Feiz hon Tadou Koz.

Er bloaz 1905 emañ moulet ha strewet diouztu, kenta niverenn « Dihunamb », an dastumadenn viziek-se, a zalc'ho da hada ar greun mat dre ar vro betek miz Eost 1944. Loeiz Herrieu n'en doa neuze nemet 26 vloaz. Harp ha sikour a gavo betek ar bloaz 1936 digant eur Breizad all : Andreo Mellag.

Kavet e vez e « Dihunamb », gerioù brezonek dibabet, sonennou ankounac'haet, dastumet endro, krenn-lavarou, sorbiennou, aliou mat a bep seurt evit ar beizanted... Hag evit strewi an dastumadenn nevez-se, mont a ray Loeiz Herrieu, gant keneiled, bep sul, a barrez da barrez, evit dubuna karantez morousket Gwenediz evit o bro Breiz-Izel. Kent pell, evit harpa e labour en em dolpo endro d'ezañ, kloarèged ha studierien, beleien ha re-all, a zeuio da veza e lennerien, e harperien, e genlabourerien. E-mesk ar re en deus Loeiz Herrieu, lakaet da vleunia o c'harantez evit Breiz, dao eo d'in henvel daou anezo, e-mesk ar re varo, enor Bro-Wened : Yan-Per Kallo'h, ha Roparz ar Mason...

Er bloaz 1905 ivez, e teu Loeiz Herrieu da veza sekretour an U. R. B. hag ezel eus ar Gorsedd.

War eun dro gant Andreo Mellag c'hoaz, e sav, er bloaz 1905, ar gazetenn c'hallek « Le Réveil breton », deuet da veza goude « Le Pays breton ».

E-pad ar Brezel bras 1914-18, Loeiz Herrieu e skriv e vuhez soudard : « Kamdro an Ankou ».

Re verr eo ar pennad-mañ, evit komz eus ar « Skol-vrezonek » savet gant Loeiz Herrieu, ha kendalc'het e-pad e vuhez a-bez ; eus ar prizioù en deus roet d'ar vistri ha d'ar vugale a zeske ar brezoneg ; eus an 3 B. en deus krouet ; eus ar c'hoariva brezonek en deus harpet ; eus al levrioù en deus skrivet... Mar plij gant Doue, lavaret a rin kement-se e Bleun-Brug bras Kastellin...

Goude eur vuhez a reizded hag a labour hep arzao, Loeiz Herrieu a zo maro d'an 22 a viz Mae 1953, da vare ma kuz an heol, evel m'en defe an Aotrou Doue selaouet ar werzenn a gaver en e zourn-skrid « Dasson ar galon » :

« Ha penn de kaerañ mem Bro, e karehen merùel,
« Un deùh kloar a viz mé, ardro ar goubañel ».

Setu tri bloaz ha daou-ugent, an Aotrou Marechal en doa benniget dimezi Loeiz Herrieu gant Loeiza ar Meliner, eur vaouez karantezus a gasas d'he fried en harp eus ar re dalvoudus en e labour speredel.

D'ezhi ha d'ar c'houec'h a vugale o deus desavet, e vennan lavaret araok echui, hon doujans karantezus, al lodenn hon eus kemeret en dristidigez melkonius he deus gwasket o c'halonou da heur galet an disperti. War eun dro ganto ni zalc'ho sonj eus labour hep par Loeiz Herrieu evit Feiz ha Breiz en hor Bro-Wened.

Mab er Hloher.

Er miz a zeu e komzimp eus an Ao. Jezegou Doue r'e bardono.

Kelc'hizer 1953 da Izili ar Bleun-Brug

1952 a zo bet eur bloavezh bras evit ar Bleun-Brug. Dre hor Bleun-Brugou bihan : Pont-e-Kroaz, Plougerne, Baod, Gwenrann, hag hor Bleun-Brug bras e Landreger, hon eus sanket hor gwrizioù e pevar-c'horn Breiz.

Hor c'henstrivadegou, dreist-holl, o deus graet berz. Kanchou a vugale a zo bet o kenstriva ; kalz yaouankizou o prezeg, o kana hag o konta, eun niver bep bloaz brasoc'h a lazou-kana a ra eus ar Bleun-Brug, hervez ger an Aotrou Perrot, eur gwir « vor a gan ».

Dre hon abadennoù-studi, hor prezegennou, hor c'helaouenn hon eus hadet hor mennoziou er sperejou, ha dre hor filmou bet diskouezet, n'ouzoun ket pet kwech, e Breiz hag el lec'h all, hon eus brudet hor c'hevredigez. Ouspenn, dre hor skol dre lizer, e vrasomp bemdez, niver ar re a vo warc'hoaz gwella harperien hor yez.

Ar bloaz 1953 a zo ivez deraouet mat. Hon abadennoù-studi, e Kastell-Paol, a zo bet plijet kalz ; Bleun-Brug bihan Boulvriag, da sul ar Pentekost diweza, a zo bet par da Vleun-Brugou 1952. Hini Kernasen, d'an 12 a viz Gouere, a vo ken kaer all.

Ar Bleun-Brug bras, e Kastellin, d'an 31, kenta ha 2 a viz Eost, a zo gantañ seblant eus ar gwella, hag a roio da Zouar Breiz brud, sked hag enor.

Kement all a labour, aes eo gouzout, ne da ket hep poan, na labour, na mizou bras.

Ezomm hon eus da veza skoazellet, sikouret ganeoc'h.

Grit brud d'ar Bleun-Brug endro d'eoc'h. Klaskit d'eomp izili, lennerien d'hor c'helaouenn, bugale ha re yaouank da genstriva.

Kinnigat d'eomp peadra da rei prizioù a zoare d'al loreidi.

... ha dreist-holl paet ho skodenn 1953 d'ar Bleun-Brug.

Er bloavezh 1950 ez eus bet 250 ezel o paea o skodenn d'ar Bleun-Brug — 172 e 1951 ha 175 e 1952.

Sonjit petra ne rafemp ket ma karfe hon holl izili, bep bloaz, paea d'eomp o skodenn !

Daoust ha pep Breton ne dlefe ket, bep bloaz, espern eur gwennege bennak evit sikour ar re a ro o foan hag o amzer, hag alies o arc'hant hag o buhez zoken evit ne varvo ket hor Breiz ! Petra ne roer ket bep bloaz evit sikour Bro-C'hall !

Fizians hon eus e klevot hor galy, hag e reot, pep hini, hervez e c'halloud, ho tever e-keñver Breiz hag he yez karet.

En araok, mil bennoz Doue d'eoc'h gant hor gwella gourc'hemennou.

<i>An Aluzenner Meur :</i>	<i>Ar Penn-Rener :</i>	<i>Ar Sekretour :</i>
Chaloni Favé.	Gab AR MOAL.	Visant SETTÉ.

Skoazeller : 200 lur — Ezel : 500 lur — Ezel madoberour : 1.000 lur.
Koumanant d'ar gelaouenn : 500 lur. — V. SETTÉ. Bleun-Brug, Ty-Carré, Châteaulin (Finist.). C. C. P. 544.22 Nantes — Tél. 1.42.

Kaset e vo d'eoc'h eur gartenn kerkent ha resevet ho skodenn.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan. — Tirage : 1.800 exemplaires.

QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.F.P.P. N° 21897



KASTELLIN

B
L
E
U
N
-
B
R
U
G



B
L
E
U
N
-
B
R
U
G

Ar maout a oa aet ganto.
Gant piou ez ay er bloaz-mañ ?

Bleun-Brug bras an douar

Kustellin, 31 a viz Gouere, 1 a ha 2 a viz Eost

- Gwener* : 14 e. 30 : Prezegennou brezonek diwarbenn : Jakez Riou, Paotr Treoure, Loeiz Herrieu, Tangi Malmanche : gant Per Bernard, Ch. Bihan, L. Lohier ha Léon Toulemont.
- Sadorn* : 9 e. 30 ha 14 e. 30 : Prezegennou war al labour douar, gant an Ao. de Guébriant, an Ao. Duigou hag an Itron Vinçot-Bellec.
- 21 e. : Noz laouen war ar Menez : *Pastoral Poullaouen ha Kan en Noz*, gant Poullaouen ha Kanerien Leon (Landi) ha Lokournan.
- 23 e. : Prosesion ar Goulou : Red an Tan ha Kan.
- 24 e. : *Oferenn-kreiz-noz* ar Bleun-Brug, war an dour.
- Sul* : 8 e. 30 da 10 e. 30 : Kenstrivadegou ar skoliou, ar Yaouankizou hag al Lazou-kana. (E skol St-Louis, er Patro, ha Ti-Kêr, evit al lazou-kana.)
- 10 e. 30 : *Oferenn-Bred* war c'hlazenn ar Menez.
- 14 e. 30 : *An douar a labour a goroll hag a gan* : C'hoariva nevez Breiz gant Bernard de Parades (1.500 c'hoarier), e-kreiz ar mêziou e Maner Toull-ar-C'hoat.
- 17 e. : Prosesion vras Douar Breiz ha Bennoz ar Sakramant.
- 21 e. : Sinema « *Mister ar Follgoat* ».
- Bemdez, e-doug ar goueliou : *Diskouezadeg Bro-Rouzig*, en Ti-Kêr.